

KIS-444 – Gl. stupéfiant

(IK da GE – 10 09 93)

O labourat war ar ger “dramm” omp en em gavet gant an anv gallek “stupéfiant”. Ha tro hoc'h eus bet da ginnig ur ger brezhonek evit an termen-se ?

(GE da IK – 14 09 93)

A-zivout Gl. *stupéfiant*, setu ar mellad eus va danvez *Geriadur ar Vezekniezh* :

“ **bader** g. **-ioù**. Dramm dezhañ gweredoù hezus, angostus, morzus ha hevredus, o tec'han arsoc'h hag estoue gant an amzer. E rumm ar baderioù emañ an opiom, ar morfin, an heroin, ar c'hodein, ar c'hanab indian, h.a.”

Evel adanv e c'hallfed arverañ **badus**, **bader**. Furmoù all evit an adanv diouzh an dro : **badwezher**, **bateiad** ha d'ar pennanv : **baduzenn** b., **badwezher** g. **-ioù**, **bateiad** g. **-où**. An diskiblezhioù hag o geriaouegi oc'h emdreiñ dizehan ha buan a-wechoù, e kavan gwell alies lakaat e-kichen va c'hinnigadennoù furmoù all bezus.

STUPEFIANT, *adj.* et *s. m.* [angl. **stupeficient, narcotic**]. Médicament dont l'action sédative, analgésique, narcotique et euphorisante provoque à la longue accoutumance et toxicomanie. À cette catégorie appartiennent l'opium, l'héroïne, la cocaïne, le chanvre indien, les analgésiques centraux à action morphinique (p. ex. la péthidine), etc. L'achat, la détention, la vente et la prescription de ces médicaments sont sévèrement réglementés. GARNIER-DELMARE, *Dict. des Termes de Médecine*, Maloine 1992, p. 844.

STUPEFIANT *s. m.* (angl. **narcotic**). Médicament doué d'un effet analgésique, narcotique et euphorisant, dont l'usage immodéré et prolongé produit un état de tolérance et de dépendance pouvant avoir de graves conséquences sur le plan humain et social. Pour ces raisons, la prescription et la délivrance de ces médicaments sont soumises à une réglementation sévère destinée à limiter leur emploi. [...] Appartiennent à ce groupe : l'opium, ses alcaloïdes (morphine, codéine), leurs dérivés et leurs succédanés de synthèse : la cocaïne, le chanvre indien, etc. *Dictionnaire de Médecine Flammarion*, Flammarion 1991, p. 795.

Evel a welez dre an daou vellad diaraok tennet eus embannadurioù diwezhañ an daou c'heriadur gallek pennañ a Vezekniezh, e lak ar galleg kemm etre *stupéfiant* ha

narcotique, pezh na ra ket dre vras an aozerion saoznek. Gwell heuliañ ar galleg en degouezh.

Da zaveiñ a ran ivez da KIS-168, La-07, pp. 40 hh. ; KIS-320, La-08, pp. 260 hh. ; KIS-390, La-09, pp. 336 hh.

Un evezhiadenn c'hoazh : evito da zont eus an un gerdarzh, Gl. *stupéfiant* ha Gl. *stupeur* ne dennont ket d'an un meizad. Ar *stupeur* zo ur stad vred n'he deus tra da welout gant ar baderioù ; fazi e ve enta ober Br. **bad** anezhi. E GBLF. ¶ 1271 e ran gant Br. **malouen** g.